

Kantik,

Var ton an den iaouank ac ar maro.

Va brois me so pell diouzoc'h
 E vit va Doue ac evidoc'h,
 Evid va Roue, ar veleïen
 Ac or lezennou ancien

Quent c'hui veve en abondañ
 Er blijadur ac er bombañ
 Brema leun a velankoni
 C'hui o c'heus chagrin ac anvi

E commançamant ar Stadou
 E zouc(1) quezet er malheuriou
 Nemet an enor ne glasch
 Ac an enor brema o clas

Cavet o c'heus an enoriou
 Ar voyen da foeta o madou
 Da gas oc'h arc'hant eus ar gear
 A da gaout evito paper

Bretonet queis me meus trues
 Ouzoch tud divar ar meas
 O Toue o Roue o c'heus nac'het
 Dre ardou an dut milliguet

Ar veleïen ac an noblañ
 Tout o c'harjach oc'h ar *potans* (potans ?)
 Petra o deus-i great bretonet
 Nemet tec'het eus o toues

Petra o doa great en oc'h andret
 Ma voac'h outo quen egaret
 Lot a joa e c'hervich oc'h ene
 A lot all o consulte

Breman oc'h lezet en o tivis
 Den ne gret rei deoc'h en avis
 Va breudeur queis al liberte
 A rai deoc'h coll oc'h ene

Brema c'hui so oll nec'het
 Gant al lezennou a zo great
 Ac er viser eus ar bombanç
 C'hui so quezet gant an noblanç

Eus a zaou c'hant anter cant leo
 Me gleo brema moues tud va bro
 Clevet a ran plouescadis
 Clederis a guinevezis

O clevet a ran gant glac'har
 A va c'haloun dign a lavar
 En em zispos bes courajus
 Da sicour er bobl quer malheurus

Bezit certen eo disposet
 Va goat evidoch da redet
 Vit va Doue a va roue
 Queit a ma vezin e bues

Adieu va mam adieu va zad
 Adieu d'an oll a Blouescat
 Adieu querent a tud devot
 En o pedennou roit deomp lot

Tostaat a ra o tilivranç
 Oll habitantet eus a Franç
 Touch a reomp oc'h an termen
 Ma raio e leis pinijen

Quen a vezo, va mignonet
 Va c'hoar a va mignonezet
 Va breur ac an oll beleien :
 Souden (me) a yelo do quichen

En o toues gant graç Doue
 Oll c'hui am guelo adarre
 Goude beza foetet Judas
 Possedet gant an diaoul bras

(1) Ms : zquc ; lire : zoc'h.